

YF_0020_Gwechall pa oan-me paotr yaouank

Gwechall pa oan-me paotr yaouank
Me am-boa choazet eur vestrez koant

Eun devez am-boa sonjet
E rankjen mond d'he gweled

Teir leo hanter a zo ahann d'he zi
Ma vije peder mond a rin

Pa oan erruet e toull he dor
Ne greden ket goulenn digor

Pa oan o sevel lein ar roz
Me a gleve son an hanternoz

Ar glao, an avel a oa yen
Ar boan am-boa ne ouie den

Ar glao, an avel a goueze mad
Ken e tivere ma dilhad

Ma mestrez koant, digorit ho tor
'man ho servijer o houlenn digor

Ne digorin ket an nor d'ar houlz-man noz
Digand ma zad me am-befe kruz

Ket da varchosi ar hezeg
Ha gand ma mevel da gousked

Benn warc'hoaz beure ha pa savin
Me a digaso deoh ho tijuni

Me a digaso soubenn al laez
'Vo mad evid ho kwall-nozvez

N'eo ket evid kaoud soubenn al laez
Ez on deuet d'ho kweled ma mestrez

Med evid klevoud ho santimant
Lared ma hini me am-boa c'hoant

Tri re votou am-eus uzet
Ma mestrez koant o tond d'ho kweled

Ha krog on gand ar pevarved re
Ha c'hoaz n'ouzon ket ho toare

Pa vi skuiz oh uzan botou
Laki ober eur galocho

Laki ober galocho koad
ha chom d'o uzan e ti ho tad

Laki ober e koad ha ler
Ha chom d'o uzan tost d'ar ger

Teir gwenojenn a zo a-dreg ma zi
Unan d'am haz, eun all d'ar hi

Unan d'am haz, eun all d'ar hi
Eben a zo evid an dremeneri